

# Kanaouennou santel evit noz Nedelek



## KENTA KANTIK

VAR DON : *Venez, divin Messie.*

Diskan :

*Deut, va Zalver, va Doue,  
Da gass peb drouk pell diouzomp  
O guir zoursen a vue,  
Deut buhan davedomp.*

Ah ! diskennit ; hastit affo ;  
Ni c'hortoz abaoue pell zo ;  
Hon dionalit dioc'h ar maro.  
Deut, va Zalver, va Doue,  
Da gass peb drouk pell diouzomp ;  
O guir zoursen a vue,  
Deut buhan davedomp .

Na zalc'hit ket a zrouk pelloc'h ;  
Ni gouez d'an daoulin dirazoc'h ;  
Ni harp hon holl fizianz varnoc'h.  
An ifern gant e gounnar  
A zeu goasoc'h da stourm ouzomp.  
Diskennit var an douar,  
Deut buhan davedomp.

Hon huanad ra vo klevet ;  
Ar madou kaer hon euz kollet  
Daoust ha ne vezint mui kavet ?  
Stank e tired hon daelou ;  
Va Doue, ma pardounit deomp,  
E vo fin d'hon ankeniou ;  
Deut buhan davedomp.

Eur vech ma vefot didkennet,  
 Ni yelo an ifern klozet,  
 Hag ar Baradoz digoret.  
 Ni c'hortoz hed an amzer ;  
 An Ee ho peuz graet evidomp ;  
 D'ho ker e rankit delc'her :  
 Deut buhan davedomp.

Grit ma c'hellimp holl assamblez  
 Kana eun deiz, en ho palez,  
 Hag ho kloar hag ho karantez ;  
 Setu ar guir eurusted  
 Zo a-viskoaz prepanet deomp  
 Eun errez deomp e rofet,  
 En eur zont davedomp.

J. B.

EIL KANTIK

E Bethléem eo ganet, Alleluia,  
 Jezuz Hor Zalver beniget, Alleluia, Alleluia.

Diskan :

*Gant laouenedigez  
 Meulomp oll Jezuz Hor Zalver  
 En eur c'hantik nevez.*

Guir Vab Doue en em c'hreat den, Alleluia,  
 A zo kousket etre daou loen, Alleluia, Alleluia.  
 Souezi rafac'h a dra zur, Alleluia,  
 O velet Doue krouadur, Alleluia, Alleluia.  
 He-unan e c'houarn ar bed, Alleluia,  
 Ha gant he vamm e vez douget, Alleluia, Alleluia.  
 Dont a ra 'n Elez euz an Ee, Alleluia,  
 Da velet er c'hraou Mab Doue, Alleluia, Alleluia.  
 Oll en eur c'hantik dudiuz, Alleluia,  
 E veulont a-unan Jezuz, Alleluia, Alleluia.

Gervel a reont ar Bastored, Alleluia,  
 Da velet ho Zalver ganet, Alleluia, Alleluia.

Deuz Saba e teu tri Roue, Alleluia,  
 Da stoui dirag ho Roue, Alleluia, Alleluia.

Da Jezuz evidomp ken paour, Alleluia,  
 E roont ezanz, mir hag aour, Alleluia, Alleluia.

Evit diskuez dre gement-ze, Alleluia,  
 Eo guir Doue, den ha roue, Alleluia, Alleluia.

Mab Doue zo e guirionez, Alleluia,  
 Mab ar Vari, atao guezc'hez, Alleluia, Alleluia.

'Vit hor prena ni pec'herien, Alleluia,  
 Eo he-unan en em c'hreat den, Alleluia, Alleluia.

Oll eta, er gouel kaer-ma, Alleluia,  
 Meulomp Doue hep ehana, Alleluia, Alleluia.

Gloar da dri Ferson an Dreinded, Alleluia,  
 Beteg ha goude fin ar bed, Alleluia, Alleluia.

TREDE KANTIK

1

Peguir an Env zo el levenez  
 Abalamour d'ar C'hinivelez,  
 Ni oll ivez a die kana :  
 Gloar da Jezuz, ganet en noz-ma,  
 Ha lavaret : Alleluia.

2

Deomp da Vethleem, deomp d'ar mechosi,  
 Mez deomp gant menoz en adori  
 Da ginnig hor c'halon deza,  
 Hag en distro e kanimp gant joa  
 Meulomp Doue : Alleluia.

3

Hirio oll grouadurien Doue,  
 A zioc'h ha dindan bolz an Ee,  
 A deir oll d'en em tuisa  
 Eyt meuli Salver ar bed-ma  
 Hag e kanont oll: Alleluia.

4

Unanomp hor mouezioù ive  
 Da gana meuleudi da Zoue,  
 P'en deuz digasset er bed-ma  
 E vab Jezuz evit hor prena,  
 Ha kanomp oll: Alleluia.

5

Deut eo da breña a nevez flam  
 Ar bed-ma kollet dre faot Adam.  
 Deut eo ive d'hon dasprena  
 Kelou dispar! — Or c'harg a joa!  
 Kanomp eta: Alleluia.

6

Rentomp e persounach ar Bugel  
 Gloar d'he Vam ha d'he fried santel  
 Pa zint dre eur vuez ar glana  
 Bet kavet din gantha d'her maga  
 Ha kanomp oll: Alleluia.

---

PEVARE KANTIK

TON: *O chœurs angéliques.*

Diskan:

*Oll elez an envou a ganaz Noël;  
 Kanomp oll evedo gant eur joa zantell:  
 Kanomp oll Noël,  
 Noël, Noël,  
 Kanomp oll Noël.*

1

En nozvez eürus  
 Ma oa ganet Jezuz,  
 Hor Mestr, hor Roue,  
 E klevet an Elez  
 O kana en eur vouez:  
 Gloar da Zoue!

2

Ar Verc'hez benniget,  
 Gant ar brasa respet  
 Stouet d'an daoulin,  
 A gleve gant dudi  
 An Elez o veuli  
 He bugel divin.

3

Evidomp pec'herien  
 Var ar plouz eo laouen  
 Jezuz hor C'hrouer,  
 Mestr ar bed, an envou  
 Zo dindan maillurou!  
 Gloar d'Hor Zalver!

---

PEMPED KANTIK

VAR DON: *Jesu Redemptor.*  
 PE: *Jesu, dulcis memoria.*

Diskan:

*Deomp holl, kristenien, da velet  
 Ar bugelik nevez-ganet;  
 Guir-vab eo d'an Tad eternel,  
 Deomp d'hen adori'n he gabel.*

1

O pebez kelou a joa!  
 E Bethleem kreiz an noz-ma,  
 E Bethleem eo bet ganet  
 Jezuz Hor Zalver benniget.

2

Eno, gant ar Verc'hez Vari,  
Eo bet ganet evidomp-ni,  
Nag hen zo koant ha grasiuz  
Nag hen zo humbl ha gouzanvuz !

3

He gorf tener zo mailluret ;  
'N eur manjouer eo gourvezet ;  
Gourvezet var eun dornad foenn  
'Tre eun azem hag eun ejen.

4

Diskennet eo leun a druez,  
Da zigas deomp ar guir vuez.  
Lakomp da dalvoud he c'hraou  
Prenet dre gement a boaniou.

5

Kanomp Noel da Vab Doue  
Hen noz diskennet euz an Ee.  
Holl, a-unan gant an Elez,  
Meulomp, meulomp he vadelez.

6

A benn poent ar gommunion,  
Guerc'hez, preparit va c'halon.  
Pa 'z in da reseo ho Mabik,  
Roit d'in ho kalon birvidik.

7

Araok na teuet davedoun,  
Mabik Jezuz, lakit ennoun  
Purete an Elez santel,  
Zo en dro deoc'h stouet izel.

8

Ennoun c'hoaz lakit, o Jezuz,  
Eur guir fizianz, eur feiz nerzuz  
Roit d'in fizianz ar Bastored  
Ha feiz nerzuz ar Rouaned.

J. B.



C'HUEC'HVED KANTIK

GLORIA IN EXCELSIS DEO

1

Mouez dudiuз an Elez  
A zesk deomp kantik an Ee ;  
Ha ni gant laouenedigez  
Var ho lerc'h a gano ive :

Diskan :

*Gloar da Zoue e lein an envou,  
Var an douar peoc'h er c'halonou.*

2

Pastored, deomp-ni displegit,  
Perak e vez an noz ken skler ?  
Perak gant hast e tiredit  
Etrezek eur c'hraouik dister ?

3

Eur Zalver deomp a zo ganet  
E Bethleem edouk an noz !  
Ar c'helou zo deomp digaset  
Gand Elez euz ar Baradoz.

4

Gant ar bastored, kristenien,  
Deomp da gavel ar Mab Jezuz  
D'Hen adori, ha da c'houlen  
Diganta grasou niveruz.

5

Evit enori Hor Zalver  
D'ar paour roomp hon aluzen ;  
Hag evit hon diouer dister  
En Ee ni gano da viken :

Diskan :

*Gloar da Zoue e lein an envou (bis).*

SEIZVED KANTIK

TON : *Il est né le divin Enfant.*

Diskan :

- *Ganet eo Roue an Elez,  
Dre ar bed oll ra vezo levenez !  
Ganet eo Roue an Elez,  
Kanomp oll e zonedigez.*

1

*Abaoue eur pevar mil bloaz  
D'ar bed ar Profed en embannaz,  
Abaoue eur pevar mil bloaz  
E c'hortozermp ar burzud braz.*

2

*E goanteri zo dudiuz !  
Trec'h d'an eol, d'ar stered lugernuz !  
E goanteri zo dudiuz !  
E arvez ken karantezuz.*

3

*Diredit timat pastored  
Da genta c'hui eo en deuz galvet,  
Diredit timat pastored  
Ar beorien eo e vignouned.*

4

*E lojeiz : eur c'hraou distoet !  
Var ar c'holo ez eo astennet,  
E lojeiz : eur c'hraou distoet !  
'Vit eun Doue pebez izeldet.*

5

*Ha c'houi, rouaned gallouduz,  
It varlerc'h ar stereden skeduz,  
Ha c'houi, rouaned gallouduz,  
It d'adori ho Mestr Jezuz !*

6

*Hor c'halon ganeomp a c'houlen  
Evithi euz an Env e tisken,  
Hor c'halon ganeomp a c'houlen  
Ra vezo dezhan da vilken.*

J. K.

EIZVED KANTIK

Kantik d'ar Mabik Jesus

Diskan :

*Enor, Gloar ha meuleudi  
Da Vabik ar Verc'hez Vari.  
Alleuia ! Noël ! Noël !  
D'ar Mabik Jesus 'n'he gavel. } (bis)*

1

*Kanomp, kanomp kantikou a veuleudi  
Da Vab Doue deuet euz ar baradoz ;  
Meulomp, meulomp Mabik ar Verc'hez Vari  
Zo diskennet en hon touez en noz.*

2

*Ne glevit ket duhont e lein an envou  
Eur ganaouen laouen ha dudiuz ;  
An elez eo o kana ho c'hantikou  
Da lavaret e zeo ganet Jesus.*

3

Nag hen zo paour, va Doue nag hen zo paour !  
 Ar bugelig a zo nevez ganet.  
 En dro dezha n'euz nag arc'hant nag aour,  
 Var ar c'holo er c'hraou e zeo kousket.

4

Ha goulskoude Hennez eo Mab Doue,  
 Doue, he-unan, hag ar Mestr var bep tra ;  
 Hor Zalver eo, hon Doue hag hon Roue  
 En em c'hreat den evit dont d'hor prena.

5

Stouomp, stouomp var hon daoulin dirazhan,  
 Bihan ha bras, paour ha pinvidik,  
 Plegomp hor penn ha leveromp oll dezhan  
 Ni hoc'h ador Jesus, en ho kraotik.

---

NAVED KANTIK

**GINIVELEZ JESUS**

Ton: *Her c'hana a c'hell'ez var tri don ar c'hantik « Evit beva gant levenez » ha dreist-oll var an ton nevez roet'e S. Feiz ha Breiz « Hirvoudou ».*

1

Gant levenez ha gant joa  
 Kanomp oll mister an noz-ma ;  
 Jesus, Mab unik da Zoue,  
 Guir Doue ha guir den ive.

Diskan :

*Deomp laouen, deomp d'hen adori  
 Da Vethleem, d'ar marchost.  
 Deomp laouen, deomp d'hen adori  
 Gant Joseph, ar Verchez Vari.*

2

Roue an dud hag an elez  
 En deuz eur c'hraou da balez,  
 Ar baourentez ar vrasa  
 Zo he lod o tont er bed-ma.

3

Petra zonjomp-ni, kristenien,  
 Ho fiziout var hor madou vean,  
 Pa deu Jesus d'ho dilezel  
 Hag en dienez da c'heneh.

4

Nag e zint dous ha talvoudus  
 An daëlou skullet gant Jesus  
 Pa skourne he zaouarnigou  
 E kreiz an noz gant ar riou.

5

Souden an noz zo goulaouet ;  
 Kanaouen nevez zo klevet ;  
 Skiltruiz ekleo ar menez  
 A gan bep eil ouz an elez.

6

C'houi pastored, c'houi oll dud vad,  
 Kerzit da Vethleem timad ;  
 Ar Messias a zo ganet  
 Hervez lavar ar Brofeted.

7

Mestr an envou, Salver ar bed,  
 Er manjouer zo gourvezet,  
 En he gichen he vam zantel,  
 Joseph, ho gardien fidel.

8

Ganet eo Jesus hon Aotrou  
Ev't rapari ar guallou  
Great da Zoue gant an den  
Ha dasprena'n natur humen.

9

Rentomp enor ha meuleudi  
Da Jesus, Joseph ha Mari ;  
En envou da Zoue gloan,  
Ha peoc'h d'an dud var an douar.

---

DĒKVED KANTIK

*Noël d'Adam*

Diskan :

*Noël, Noël, kan esperans  
Noël, Noël, kan esperans  
Ganet eo deomp Emmanuel  
Kanomp eta leun a fizians,  
Leveromp oll Noël ! Noël !*

1

En nosvez-man e zeo deuet eus an Envou  
Dre garantez da glask hor c'halonou,  
Jezuz hor Mestr, hor Zalver trugarezuz  
Vit hor prena hag hor renta eürus.

2

E Bethleem en eur c'hraou anter disto  
E kreiz ar goanv, var gun dournad kolo  
Roue an Env zo deuet eus ar Baradoz  
Da rei d'an d'en ar peoc'h hag he vennoz.

3

E zaoulagad leun a sklendet an Envou  
A veac'h digor, a zo leun a zaélou  
Varzu ennomp ec'h asten gant karantez  
E zaoutarnik karget a vadelez.

4

Na piou eta a refuse e galon  
Da vab Doue, da vabik ar Verc'hez  
Kinnig a ra d'ar bec'herien ar pardon  
Ha d'an den just douster ha levez.

5

O va Doue, nag a bed fallagriez  
Am beuz-me gret bemdez en oc'h andret  
Da beb mare c'hui a ro d'in ar vuez  
Am beuz siouaz da bec'hi implijet !

6

Hiviziken me a ro deoc'h va c'halon  
Ha va ene gant he oll skianchou  
Beteg 'r maro ho plijit beva enhon !  
Evit eun deiz mont ganec'h da repos.

IMPRIMATUR :

Quimper, le 4 décembre 1912

A. GADON, v. g.

---

**ADESTE FIDELES**

1

Tostait pobl fidel, deut laouen, da velet  
E Bethleem, en eur c'hraou diskennet,  
Roue an Elez,  
Ganet gant ar Verc'hez.  
Deut oll, deomp d'hen adori  
Gant Joseph ha gant Mari,  
Deomp d'adori Mab Doue inkarnet :



2

Gant hast ha levezeg, heuilomp ar Bastored  
A red d'ar c'hraou o tilez ho denved :

Stouomp d'an daolin

Dirak ar Mab divin.

Deut oll, deomp d'hen adori...

\*3

Ni a velo kuzet, dindan furm eur bugel  
Ar Verb, guir sklerder an Tad Eternel :

Dindan maillurou,

Jesus-Christ hon Aotrou,

Deut oll, deomp d'hen adori...

4

Doue eus a Zoue, sklerdet eus ar sklerdet  
Jesus gant eur guir gorf a zo guisket :

Henvel e pep tra

Ouzomp deut da veza.

Deut oll, deomp.....

5

Frank, deomp oll e tigor he ziuwrec'hik tener  
He zaoulagadik zo leun a zoueter :

Na pegen koantik

Eo Jezuz bugelik !

Deut oll, deomp.....

6

Ar Verc'hez ha Joseph a zo en he guichen  
Hag ive an ejen hag an azen :

A zell truezuz

Ouz ar Mabik Jezuz.

Deut oll, deomp.....

7

Evidomp eo ganet paour, var foen astennet  
Deomp da boket d'he izili sklaset :

Karomp oll Jezuz

Meurbet karantezuz.

Deut oll, deomp.....

8

Kanomp gant an Elez, oll assembles, herio  
Ar Gloria in Excelsis deo :

Gloar, meuleudiou

Da Zoue en nenvou.

Deut oll, deomp.....

9

Dindan furm ar bara, er Zakramant kuzet  
E ma Jezuz e Bethleem ganet :

Jesuz hon Roue,

Guir Den ha guir Doue.

Deut oll, deomp.....

10

Deomp gant feiz, esperans, ha karantez guirion  
D'hen diguemer dre ar Gommunion :

En hor c'halonou

Puill e skuillo graçou.

Deut oll, deomp.....

---

## Kantik goude ar Gorreou

Ton : *Que cette voûte retentisse.*

1

Gant an elez stouet ken doujus,

Adoromp ive hor Zalver ;

Kinnigomp hor c'halon da Jezus

Ema breman var an aoter. } *bis*

2

Kuzet er mister a garante

Dindan spesou guin ha bara,

E guir dasprener, e guir Doue,

E guir Dad e teu d'hor maga. } *bis*

---

Brest, Moullerez ru ar C'hastell, 4



# Cloche de Noël !

## *Refrain :*

Chante dans la nue,  
Cloche de Noël !  
Dis la bienvenue  
A l'Emmanuel !  
Chante dans la nue,  
Cloche de Noël !

- 1 Dans le ciel bleu tout peuplé d'anges,  
N'entends-tu pas ces chœurs étranges ?  
Chante, chante voix des airs !  
Par delà monts et déserts,  
Mêle-tes louanges  
A ces doux concerts !
- 2 Tandis que l'Orient s'éclaire  
Annonce à tous le grand mystère !  
Chante, cloche de Noël,  
Le Sauveur, l'Emmanuel.  
Qui vient sur la terre  
Nous ouvrir le Ciel.
- 3 Pour nous tirer de la détresse  
C'est Dieu lui-même qui s'abaisse  
Chante, chante dans la tour  
Où tu veilles nuit et jour,  
Chante la tendresse  
Du divin amour !
- 4 Jadis Satan fut notre maître,  
Son règne enfin va disparaître,  
Chante, voix des saints parvis !  
C'en est fait des jours maudits,  
Car il vient de naître  
Le Sauveur promis !
- 5 Noël ! Noël ! la nuit s'achève  
Comme au réveil finit un rêve !  
Chante, chante, airain pieux,  
Pour tes Carillons joyeux,  
L'aube qui se lève  
Dans l'azur des Cieux !